

Notenn : N'ouzon ket piou eo an den-ze, Riou e ano. Marteze e lenno e skridou war Embann an Hirwaz ?

A. ar Merser

e-mail : andrelemercier@hotmail.com

Bleo

Eur wech 'oa eur Yuzeo, Filkenstein e ano, Benoni Filkenstein. Bez' e oa o chom en eur gêriadennig, Solwesli, er Pologn - e gouarnamantou ar Huz-Heol, 'vel ma lare bugale devod an tsar.

Paour 'oa Benoni, paour-raz. Neuz truill he-doa ivez ar gêriadennig, eun ugent verstad - 21 km - euz Vilnius. Ha paour an dud o chom enni, Yuzevien an oll anezo, bet plantet er hornad-mañ ablamour e tisplijent da Dadig ar goyim - an nann-Yuzevien - eun Impalaer Aleksandr pe Golaz : saotra 'reent douar Rusia zantel ! Disvroet, hag enbroet, heb ma vefe bet goulennet o ali diganto : atao e vez ar gwir - sañset - gand ar Pennou-Braz ; d'ar beorien da blega, breset 'vel pri dindan paoiou kezeg an dudjentil. Setu 'ta e oant bet parket, evel ma vijent bet loened mud, er vro divalo-mañ. Darn all - gwasoh c'hoaz - a oa bet harluet e norz Siberia evid deski dezo labourad er mengleuziou hag ar hoajou divent.

Ar mod-se e tro rod ar bed, ma zud vad. Gwechall, gwall bell 'zo, Mestr an Neñvou hag an Douar e-noa roet dezo beza trehourien, n'o lakee da dreuzi Mor ar Broenn - ar Mor Ruz -, pa freuzent mogerious Jeriko gand son skiltruz ha drant o zrompillou, pa ree lamm David bihan d'ar ramz Goliat, pa rene Salaun, ar roue fur, saver an Templ, euz ar Goueleh beteg ar Ster Vraz. Alaz ! Mil gwech alaz ! Eet oa an taoliou-kaer da varzoñj e brumennou dispiz o zremened bet gloriuz ha dispar !

*

**

Paotr yaouank koz e oa Benoni, bremañ war e bemp bloaz ha tri-ugent. Ha kemener. Med takona 'ree kalz muioh eged farda dillad nevez. Arabad deoh dizonjal, lennerien ger, e oa Solwesli eun tamm toullig a netra, pell diouz an heñchou darempredet gand ar varhadourien. Ouspenn, ha forz penaoz, ne vije bet tu da brena dillad nevez pe wiskamañchou diouz ar hiz, zoken en eur varhata evid chipotal eur hoperig - eur zantim - bennag. Kalz bugale 'oa da wiska... ha da vaga, i hag a gase o reuz er ruiou striz, o yudal e yiddisch, eur yez bet krouet, a-hed an amzeriou, gand o zadou o kantren dre vroiou Kreiz ha Norz-Europa : bommou alamaneg, eul loaiad ruseg, eur begadig arameeg, yez an Douar Zantel gwechall goz.

Evel eur moujik - eur peizant - e veze gwisket Benoni war 'r zizun : kasketenn

blad, saro griz gand gouriz ler, otou griz flokenn, botchou divalo. Med azaleg ma ree van heol ar gwener da ziskenn, a-raog ma tigorfe ehan-labour deiz sakr ar Zabat, e lakee war an daolig e-kichenn e wele, e zillad hassid, a Yuzeo devod-meurbed, evel pa vije bet o vond da stoui-distoui, en eur bedi, dirag Moger an Hirvoudou, er Gêr Zantel : eur vantell zu, hir beteg e zeuliou, da holei eur roched wenn feret hag eur bragou, du ivez, kempenn, eun tok du, eriennet ledan war e vleo hir o hriza. Da vintin an Deiz Meur, e ree eun taol krib d'e farbochou¹ a guze hogozig oll e zremm rouzard, o tiskenn euz e ziskouarn beteg kolier e roched.

*

**

Gwisket reiz, e veze e stad evid tostaad ouz ar zinagogenn, da zelaou komzou al Leor - (marteze e vefe pedet da vond da lenn), - ha prezegenn ar rabin, da gana gand gred ha devosion ar zalmou a binijenn, ar zalmou a veuleudi, ar zalmou a spi. Ha gand ar vodadeg e hellfe huñvreal : « Ar bloaz a zeu, Yeruzalem ! » Abaoe kantvejou dir didermen o harlu Boudedeved, gand ar zoñj-se, e troe da dridal

¹ farbochou : ? Marteze "plañson"

kalonou ar meuriadou bet dibabet gand ar Peurbadel, meulet ra vezo ! Nag a drivlid pa groge ar mestr-kaner gand ar zalm I17¹ : « M'az tizoñjan, Yeruzalem, ra zizeho ma dorn dehou... ma ne ran ahanout barr ma levenez... » Peur e teufe da wir, evito, poziou ar Zalm 126 « Pa zegasas d'ar gêr on Tadou en harlu e Babilon, neuze e c'hoarzem gwalh or halon, kanou e-leiz en or genou... » Diwar-ze, nerz-kalon da staga gand labouriou eur zizun all...

*

**

Gand an amzer a-vad e teue da veza bresk nerz-kalon ha feiz Benoni. Hag eur mennoz penneg a durlute en e spered, ken e krede a-wechou e troe da vriz² : karet e-nefe kaoud eun tamm darempred bennag, - ha pa na vefe nemed eur predig-amzer - gand Yuzevien binvidig. Rag bez' oa anezo, e Frankfurt, e Pariz, en Amerika. A vare da vare e veze kelou anezo war gelaouenn yiddisch Vilnius. Kelou anezo hag euz o frofou. Ha neuze e veze piket stard kalon ar paour-kêz Benoni, - eun tentadur ? - gand ar c'hoant da vond daveto, da dañva, eñ ivez, ar plijaduriou -

¹ an niverenn anezo er skrid-mañ a zo hini ar Bibl hebreeg.

e troe da vriz : e teue da veza sod.

reiz ! - diwar arhant kaoh an diaoul. E:r bed-mañ, a-raog ma tistrofe da zioulañs an hini all, ar sheol, gand eneoù tasmantet e hourdadou, kouezet mil bell 'zo, e toull ar brein.

Nebeud-ha nebeud e kavas an ijin da drei evid ar mad - sur - e dentadur : mond da bedi eur Yuzeo mondian da zond war zikour peorien Zolwesli. Hag e vefent, i o-daou, madoberourien eur gêriadenn chomet diwar-lerh beteg neuze. Diskoacha 'reas e plegou ha displegou e empenn meur a skwer prisiuz araokaad : frankeet e vefe an heñchou, plênneet ar ruiou. Êsoh e vefe an darempredou gand an diavêz hag an amezeien. Ha c'hoaz: eur medisin gouizieg a zeufe da chom e-kichen ar zinagogenn ; mistri-skol, kelennerien, a rofe sikour d'ar rabin ; solutoh e vefe savet an isbaou, - nêt a-viskoaz ! (Ne veze ket eno evel gand ar voujiked : ar re-mañ, e-leh skarza al loustoni, a hortoz, gand pasianted, e vefe en o lojou eun druillad laou hag amprevaned all o veva braoig diwar-goust tud ha loened, a-barz pulluha o bern lastez, ha mond da zavel ti eun tammig pelloh. Da hortoz...). Bez' e vefe staliou kenwerz a beb seurt. En e hini e vefe kavet da brena danvez mad, seiz, mezer saoz, evid gelloud farda dillad nevez ha diouz ar hiz. Stad a vefe greet euz Solwesli, skwer evid an oll gêriadennou ; kanet e vefe he meuleudi e Vilnius, ha pelloh c'hoaz.

Kas da benn ar mennoz-se a roe da Venoni Filkenstein digarez kaer evid lared

d'e amezeien e tileze e stal hag e vefe dalhet gand eun niz dezañ, Zabulon Krechenko, greet gantañ studiou uhel... ha dilabour.

*

**

En eur furchal piz - hervez ma laras - e paperiou koz e lignez, e kavas e-noa eun tamm kendro¹ euz meuriad Isakar eveltañ. Demglevet e-noa, e ghetto Vilnius, e oa kemener - unan gwirion - e Pariz. N'anaveze 'ta nemed e ano ; al Leor a lar avad ez eo an digeri darempredou gand an dud kar eun dra da veza meulet. Tu e-nefe da houlenn digantañ penaoz e troe e yhed, hini e famill. Ya, med dreist-oll, penaoz e oa deut a-benn d'ober berz e-touez ar goyim. Tro a vez, a lar ar Furnez, da denna kentel diwar ar beajou, en eur geñveria doareou-beva disheñvel-mad diouz re hoh endro.

Mond a rafe 'ta d'ober eub droig beteg ar Gêr-Sklêrijenn, 'vel ma kane dezi ar journaliou. Enni e kavfe peadra da walha e spered hag e galon estlammet... Hag e gov?... (An dra-mañ a-vad ne vez ket anzavet dirag an nesa! A-hend-all e tremenfeh da bublikan brein!) Mad pell 'zo : darempred e-nefe gand eur Yuzeo

¹ kendro : kenderv.

pinvidig. Ne ouie ket galleg, ar Benoni, med drailla 'ree alamaneg, ha gouizieg 'oa war ar yiddisch.

Kas a reas eul lizer d'ar Parizian, Arnold Weinberg, bet diskoachet gantañ e jomleh e leor micheriu ar Yuzevien e Bro-Hall, dres pa oa eet da gaoud e niz. Reñka 'reas e aferiou, kentelia Zabulon. D'ar Zabat e pedas birvidig er zinagogenn, o houlen digand ar Beurbadel rei dezañ eun Êl-heñcher. Evel da vab Tobit. Tri devez goude, e pignas e karrig kiger Solwesli a yee da Vilnius. Eno e kemeras an treñ evid Warszawa. Morvitellad a reas e-pad eul lodenn vad euz e veaj : ar wech kenta dezañ da veza brañsigellet evel-se.

Estonet-nêh e veze Benoni gand an oll draou nevez - evitañ - a wele. Pa veze dilhun. Dre brenest e gombod e seblante dezañ e rede rag-eneb dezañ, parkeier hir-hir a vetarabez-sukr pe avalou-douar, siminaliou uhel-uhel, dreist-oll tro-war-dro d'ar gariou, gand o moged o kuzad an heol. Maget mad e oa an dud ; loened kaer a beure er prajeier.

Kompren a ree ivez e selled outañ evel eur Boudedeo, eur Jan-Bleo termaji, diflipet euz leoriou koñchennou a-wechall, eun urupaill iskiz, koz-Noe, diheñchet e-touez tud an XIX^{ved} kantved. Mousc'hoarzin a reed pa zelled outañ a-gorn, ha c'hoarzin goap a-dreñv e gein. Den a-vad ne laras ober tantad en-dro dezañ, evel e c'hoarveze gand Yuzevien a-wechall, hervez e-noa lennet en e leoriou istor. Evid ar

gristenien - gwall wan o hristeniez - ne oa, e gwirionez, nemed eun "netra" farsuz.

Gand eur paotr yaouank, pignet en treñ e Frankfurt, e hellas erfin kaozeal bravig. Eur Yuzeo a oa anezañ, o vond da Strasburg evid e studiou a relijion. Benoni a houlennatas anezañ war gustumou ar "bed nevez" el leh e oa e riskl da veza beuzet. E-pad an arzao e kêrbenn Alzas, ez eas gand e vignon beteg sinagogenn vraz kêr. Bez' e oa eno tud devod, daoust dezo bet gwisket evel ar goyim. Niveruz e oa ar Yuzevien er vro, bankerien eveljust, med ivez marhadourien-gezeg. Aferiou mad a reent gand ar gristenien. Ha brao an darempredou etre an daou rummad.

Kement-se a roas kalon da Venoni evid kenderhel gand e veaj... Ha kas da benn e vennoz, e gefridi... Eur zekred e-noa, o trei-distrei en e spered, eun dra ha n'e-noa disklêriet da zen. Tostig 'oa dezañ sponta d'hen displega frêz dezañ e-unan !

*

**

Erfin, skuiz-marzo da veza chomet azezet keid-all war vankeier koad an trede klas - ar pevare en Alamagn - e-noa mall erru e kêr-benn Bro-Hall. Eun tamm enkreuz ivez : peseurt degemer e-nefe digand e gendro dianav... Skrivet e-noa dezañ : « Gwisket e vin evel eur hassid ; em dorn kleiz e tougin eur valizenn zu,

skrivet braz warni : Vilnius. » Pa hellas diskenn war 'r hae, setu ma welas eun den o selled piz ouz malizennou ar veajourien.

- « An Aotrou Filkenstein ? »

- « An Aotrou Weinberg ? »

- « Shalom, kendro ! »

- « Ha deoh ivez, kendro, shalom ! »

Stard-dorn, pok, flouradenn war 'r hein.

- « Ema ar wetur er strêd ; deuit du-mañ heb ardou nag aon ; plijadur a ra din, ha d'am famill, reseo ahanoh dindan on toenn. »

- « Bennoz deoh da veza ken hegarad, kendro. »

Kuiteet gantañ talabao ar gar, e oa soubet Benoni e safar ar strêjou. War houlenn e gendro e pignas en eur rederig skañv, kalz souploh eged kirri Solwesli, pe bankeier an treñ !

- « Deoh eo ar wetur-mañ ? Ha mevel eo ganeoh ar blenier gwisket kran ? »

- « O ! nann ! N'on ket pinvidig a-walh da hoari ar mondian ! Feurmet 'm-eus anezi evid diou eurveziad. »

Eun taol lagad a reas Benoni ouz red-dired heb ehan tro-dro dezañ. Serri 'reas buan e zaoulagad : bez' 'oa da weled traou dañjeruz evid ar horv hag an ene, traou displijuz evid eur hassid. Ken e kredas e oa erru e ti Arnol Weinber dindan pemp

munut !

*

**

Brao e oe greet dezañ gand mestrez an ti, Anna Petrovicht, ha gand c'hweh bugel an tiegez : pemp paotr hag eur verhig. Dindan e dog e veulas Doue evid ar binvidigez bet grateet d'ar famill hag a rafe bepred diouer d'e galon paotr koz. Bugale, doare da veva er beurbadelez...

Kaset e oe d'eur gambr, braz, nêt, gand peadra da gousked c'hweg ha d'en em walhi. Diskenn 'reas gand e gendro ; edo mare koan : meuziou dispar. Alaz ! ne oa ket kasher ar hig hag a hillige staon ar hassid, a-raog beza debret ! Ken e oe bet tost dezañ tañva an tamm rost kinniget dezañ. Nerz a-walh e-noe evid lared : « Nann ! trugarez ! » An evachou, kreñv pe zous, a oa ivez euz ar henta, o lakaad da zével huñvreou e spered hag e kalon an ever dour a oa anezañ a-viskoaz...

Hag an Arnold Weinberg a lare ne oa ket pinvidig ! E peleh 'ta e kavfe eur Yuzeo pinvidig ? Ha ne vefe ket anezo e-touez kemenerien ar Gêr-Sklêrijenn ? Ha da Londrez, da New-York e rankfe mond ?

- « Ha piou 'ta a zo pinvidig amañ ? » a zilas e skouarn e gendro en eur bignad beteg e gambr cheuh.

- « N'em-jalit ket ; bez' 'z eus anezo e Pariz. Deuit ganin warhoaz vintiin da di ma banker, hag e welot eur pinard a Yuzeo, unan pinvidig-mor, bet rastellet argant gantañ e pevar horn ar bed. »

Fall e kouskas ar paour-kêz Benoni en e wele soupl : tremen ha distremen a ree en e spered gweled faltaziet eur mondian euz e relijion...

*

**

D'ar mintin war-lerh ez ejont war o zroad beteg an ti-bank Perera. Anavezet mad e oa eno ar hemener Weinberg : eñ eo hag a farde dillad ar famill Perera ha gwiskamant-micher oll implijidi ar Greizenn e Pariz.

- « Hag a-nevez, Weinberg ? a zistagas an aotrou Rener-Meur. « N'em-eus ket kalz amzer hirio da zivizoud ganeoh, Arnold ; pedet on da vond da vinistrerez an Argantou ; ar Ministr a fell dezañ goulenn ma ali diwar-benn eun amprest da rei d'ar Rused. »

Sonn 'vel eun ibil, ar Rener-Meur a ziskenne gand eun diri ledan, war dapis ruz. Weinberg a hellas lared dezañ : « Setu eur hendro din, an aotrou Benoni Filkenstein, kemener e Vilnius (!).

- « Ma den mad, eun aluzenn evid ho skodou ?... Setu 1 000 lur. »

- « Trugarez, aotrou Rener-Meur ; Adonai d'ho paeo. Med, med... »
- « Hastit buan ! »
 - « Du-mañ ne varv den pinvidig ebed... Setu 'ta... »
 - « Hañ ! Anton, ha prest eo ma gwetur ? »
 - « Ya zur, aotrou Kener-Meur. »
- Hag an aotrou kuit diwar diz.
- « Setu m'ho-peus gwelet, demwelet, kendro, eur Yuzeo pinvidig, unan gwirion !
 - « Trugarez deoh evid ho madelez. Bremañ e hellan distrei da Zolwelli gand eur zahad traou sebezuz da gonta d'am henvroiz !

*

**

An deiz war-lerh ez ee Benoni gand an treñ war-zu e gêriadenn garet. Eno e vefe adarre anezañ eur hemener-takoner ampart, eur hassid fidel d'oll hourhemennou al Lezenn hag ar Brofeted, beteg ar bihanna anezo (bihan, evid Yuzevien 'zo !). Pedi, kana a greiz-kalon a rafe evel a-raog.

Hag e soñje en e gomhod : « Mar deo seurt tud or re binvidig, gwelloh beza Yuzeo paour e karantez ar Peurbadel... » Med da veza tañveet eur predig-amzer

nemetken êzamtant-beva an dud pinvidig, e tisterree e feiz striz a hassidizm. A ! ma plijfe gand an Uhel-Meurbed lakaad an aotrou Rener-Meur Perera da zond war zikour an araokaad e Solwesli !... Heñchou... Ruiou... Skoliou... Danvez kenta klas da floura evid gwiska tud cheuh or Hêriadenn ... ha Vilnius !

*

**

E keit-se e kase en-dro an aotrou Rener-Meur e aferiou. Eet oa d'ober eun dro da Londrez evid gweled e gendro (eñ ivez e-noa kendirvi e peb kêr vraz euz ar bed !), Moizez Smithson, anavezet mad er "City" gand an oll vankerien. Kelou fall a oa war varhad an ed e Chikago : riskl 'oa da goll eur yalhad milionou.

Du e benn, e tistroas da Bariz. Ha setu : distaol braz, e Frankfurt, war 'r billeji Perera. Ha c'hoaz : ne oa mui gonid ebed gand mengleuziou diamant an Transwaal. E Bours Hong-Kong e-noa dispignet en aner kalz argant, o kredi e vefe bet digoret linennou-houarn tro-war-dro Kanton.

N'ouzer dare penaoz e teuas en e spered rei eun taol-lagad er Skrituriou. Abaoe pell 'zo n'e-noa bet nag amzer na c'hoant d'ober kement-se.

Er zalm 49 e lennas - sur evitañ e oa bet skrivet - : « Pa oa beo an den pinvidig en em veule, o kana d'e ene ar vad a roe dezañ. Med pa varvo, netra gantañ ne gaso, e

lorh ne ziskenno ket d'e heul. » Med « brokuz e tle beza an den pinvidig e-keñver ar beorien (112) ; « eüruz an hini a daol pled gand an den paour ha dister (41). » Hirzoñjal a reas pa gavas e Qôhèlet¹, hag adaleg ar penn kenta euz al leor-ze a furnez : « Avel avel, avel oll ! »

Tost 'oa Rener-Meur an ti-bank Perera da veza pevar-ugent vloaz, termen buhez an dud nerzusa, eun taol-kaer, hervez ar zalm 90. E riskl e oa 'ta da veza pedet, heb dale marteze, « da vond da gaoud lignez e Dadou ha na welint biken ken ar sklêrijenn. »

*

**

O tremen dre Genève e roas 10.000 lur d'ar Groaz-Ruz ; e Wien, 10.000 da ranna etre Yuzevien baour kêr-benn Aostria. Dres neuze e resevas eur pellskrid digand e zekretour e Pariz : distaol brasoh-brasa 'oa war 'r billeji F'erera ; spontuz 'oa dija ar holl ; a-barz-pell, ma troe ar jeu evel-se, e vefe demhoullo ar yalh. An implijidi, ha ne oant ket bet paeet abaoe miz, a ginnige ober diskrog. Daoust d'ar helou-ze e kendalhas ar Rener-Meur gand e droiad ; ne oa ket amzer da strana. En Odessa,

Qôhèlet : Ekeziast.

10.000 lur d'ar zinagogenn war he dismantr. 30 000 lur, nebeudig a dra evid an aotrou Perera !

Pignad a reas beteg Warszawa. Truezuz e kavas stad ar ghetto. Hag eur prov a 20 000 lur : gwechall e oe bet o chom eno familh e wreg Eve Hlaroussian ; setu perag e oa bet brokusoh.

Eur pellskrid euz Pariz : war vihannaad bemdeiz ez ee argant an ti-bank. Pedet 'oa stard an aotrou Rener-Meur, gand ar Buro-Braz, da zistrei buan-buan, da glask prim ar pezh a oa d'ober, evid savetei ar stal.

Skuiz e oa o redeg bro. Med laouen memestra, eüruz zoken, hervez ma skrive da Bariz. Medisined vrudet, goulennet o ali diganto, a zisklêrias e oa an aotrou Rener-Meur war hent ar follentez a eurvad, diêz-tre da barea. Poent braz e oa lakaad harz warnañ a-raog na stranikfe nêt an ti-bank. Ha da heul kalz a dud hag o-doa bet fiziañs ennañ, abaoe ugent vloaz pe vuioh.

*

**

Edo Perera o vond da guitaad Warszawa evid Stochkolm pa zeuas soñj dezañ euz kemener Vilnius hag a oa bet e weled e Pariz gand Weinberg, eun den iskiz, doare dezañ beza eur profed, eun den-Doue.

Eun arzaio a reas 'ta e Vilnius ; eno e houlennas digand rabin ar zinagogenn vraz e pe ru 'oa o chom eur hemener anvet Filkenstein. Dre jañs e oa ar rabin breur-kaer da Grechenko, tad Zabulon. Mond reas d'e gaoud. Bez' 'hellas lared d'an aotrou Perera e oa Filkenstein o terhel eur stalig kemener-takoner e Solwesli, ugent verstad euz kêr. Red e vefe 'ta d'an aotrou Perera diskenn beteg ar gêriadenn-ze da weled ar hemenerig.

Edo Benoni o wiska e vantell-bedi pa zeujod da lared dezañ : « Eur bourhiz, pe eun denjentil, a zo o houlenn war ho lerh. » - « Aotrou Doue benniget ! Perera, sur mad. Ema deut an den pinvidig beteg ennom en e zoñj rei sikour brao da Zolwesli en heh araokaad. »

Degemer doujuz a reas Benoni d'an aotrou Rener-Meur : "shalom" ha souplesou, o tenna d'ar mod a vez greet e Yeruzalem dirag "Moger an Hirvoudou", a laras Perera d'e dog. - « Na pebez enor evidon, evidom, da weled eun den ken brudet o teurvezoud gantañ dond beteg eun toullig ken divalo. Biskoaz n'eus erruet amañ eur fed ken souezuz. »

Treuteet 'oa an aotrou Rener-Meur, pasaad a ree aliezig ; goulenn a reas eur werennad dour ha kaoud tu da vond da ziskuiza war eur gwele.

- « Skuiz-marzo on gand ma beajou hir. » Ha Benoni gand eur vouez uvel da ginnig dezañ e gambr, tristig a-walh, evid loja...

- « Ha c'hwi, aotrou Filkenstein ?

- « Mond a rin da gousked war 'r gador-vreh, e-kichenn ma mekanik-gwriad.... A-raog a-vad eo red deom koania. Eun amezegez, Anna Grimencheka, a zeuy buan d'aoza eur pred a-zoare, daoust ma vefe marteze divalo evidoh. »

Mond a reas ar pinvidig e kambr ar paour-kêz. Ha serri an nor warnañ. En tu all d'ar speurenn e oa jeu braz gand ar geginourez, eun tammig abafet, dindan lagad evesauz mestr an ti.

Eun eurvez goude, e skoas Benoni war dor ar gambr. Edo ar banker o skriva. O-daou e tebrjont eur zoubenn deo, eun tammig kig kasher, eur wastellig toaz dihoel. Dioustu goude e tistroas an aotrou d'ar gambr. Echu distalia an daol gand Anna, ez eas Benoni da embann dre ar vourhadennig : « Eun den pinvidig-mor, eur banker euz Pariz, a zo deut da jom em zi. Ema o kousked em gwele ! »

Pa zistroas d'e loj, e skoias goustadig war dor ar gambr. Edo atao an aotrou o skriva. « Nozvez vad deoh, aotrou Rener-Meur. » - « Ha deoh ivez, aotrou Filkenstein. » A-barz nemeur e oe klevet gwele ha kador-vreh o wigourad. Ha kousket an daou zen. En e stagadennou huñvre e wele Benoni... heñchou... ruiou... skoliou... « Na kaerat taolenn ! »

*

**

Da zeg eur vintin ne oa ket c'hoaz savet ar banker benniget. « drol, ne ziblouz ket abred, an dud-se. Hag hir ha skuizuz e oa bet e veajou. »... Da unneg eur, den ebed, trouz ebed kennebeud. Neuze Benoni da skei war an nor... Ha da skei eur wech all... Netra... Eun tammig ankeniet, e tigoras an nor.

Astennet war 'r gwele, digor braz e henou, difiñv, an aotrou !... Maro !... Ma ne vefe ket bet ken strafuillet, e-nefe marteze laret : « Evid eur wech, e varv eun den pinvidig e Solwesli. » Med soñjal reas, pennfollet : « Nag a dregas bremañ evidon ! Ha da genta kelou da gas da Bariz. »

Eüruzamant e oa e Vilnius eun Yuzeo Fall, brudet a-walh, banker, hag anaveze sur an aotrou Rener-Meur, dre ma n'oa bet gantañ, kazi-sur, darempredou micherel. Gand ar rabin ez eas Benoni d'e gaoud, o kas gantañ an oll baperennou chomet war daol ar gambr-kousked, eur golo-lizer braz, digor, heb chomleh warnañ. Ennañ eun nebeud re all, serret kloz, ha skrivet war unan anezo, hervez ma laras ar Gall : « Amañ ema ma zestamant, da veza digoret ha lennet gand eun noter euz ar vro-mañ (bez' 'z eus unan bennag anezo a oar ar galleg) ; ha prim goude ma maro. »

Ar Gall, Mathieu Israel, a bellskrivas d'an ti-bank, da rei kelou euz maro trumm an aotrou Rener-Meur, ha da houlenn an urziou An deiz war-lerh e teuas ar respont : « Intron Perera, Sydney : sebelia pried Vilnius. Evid testamant seveni

bolontez Rener. »

Setu ma oe kanet eun interamant kenta klas d'an Aotrou Rener-Meur, gand eul laz-kana euz Vilnius.

An deiz war-lerh e eas an aotrounez Filkenstein, Izrael , hag ar rabin da di eun noter evid ma vefe digoret an testamant.

Berr-tre 'oa ar skrid :

« An oll vadou war ma ano en ti-bank Perera a legadan da Zolwesli, o pedi an aotrou Benoni Filkenstein, ma mignon, da ober kement a zo red evid seveni ma mennoz. »

E Solwesli, d'an 12 a vezeven 1808.

Eur skrab-yar : *S.Perera.*

O kleved ar helou-ze, tud Solwesli, ha darn euz Vilnius zoken, a ganas gloar ha bennoz d'an aotrou Rener-Meur, ken madelezuz e-keñver ar beorien. Beteg ma tegouezas eur pellskrid euz bank Pariz da lared :

« Er bank, gwenneg ebed war Perera. »

Sikouret gand Izrael, e kemeras warnañ an den a lezenn kas eul lizer : sur e oa madou al : tier, adtier, oberou-kaer, hag e se, war gont an aotrou Perera. Ar zizun war-lerh ez erruas ar respont : *« An oll zanveziou all a zo war ano an intron Perera ha n'he-deus billed ebed er bank. Ouspenn, disklêriet eo ar bank e freuz-stal. A-boan ma chom*

er hef peadra da hanter-baea an implijidi. »

*

**

Benoni a skuizfe c'hoaz o takona ; fankeg e chomfe ar ruiou, striz ha dirapar an heñchou (gwenojennou !), izel stad an deskadurez. Ha medisin ebed. Koulskoude e talme mort ha dizingal e galon da Venoni : poumpoum... poum... poumpoumnoum ; o heklevi beteg e zaou ividig.

Alaz ! Eur paour-kêz muioh, ha netra ken, a oa maro e Solwesli goude meur a hini all.

« Bleo ! a youhe Benoni Filkenstein, takoner, en e gousk mahomet, o temweled e huñvreoù a binvidigez hag araokaad o tehed d'an daoulamm ruz, en eur hoarzin goap, evel bugale diaouleg o tifoupa euz e spered trelatet : « Bleo ! »

(Miz here 1993)